

DISUL



Jean-Michel Veillon

Jean-Mathias Petri

Da Gristen Noguès ha Jacques Pellen e tediomp ar bladenn-mañ

Tamm-ha-tamm 'zo deut fleütoù a bep seurt da ober o jeu war dachennoù liesliv ar bladenn-mañ. Un deg a fleütoù, disheñvel ar stumm anezho, disheñvel an ober anezho, disheñvel an orin anezho, lod fleütoù metal ha lod all fleütoù koad, kement ha ken bihan ma vez dispaket ganto diouzh an druilh sonioù nevez hag arlivioù dic'hortoz.

Diwar ar c'hoad ken treantus hag ar metal ken didrec'hus, diwar sonioù don ha strobiniellus ar fleüt-oktoboud, diwar sonioù fromus ha kevrinus ar fleütenn vihan he skeul gozh a Vro-Wened, e teu gant Jean-Michel kanaouennoù diouganus ha gant Jean-Mathias galvadennoù liesvouezh ha skoadennoù gouez.

Gant gwenojennoù disheñvel, ar re-seoù o deus bet toullet o hent a sonerezh. Hag en ur c'hroazhent hud a Vro-Dreger, dianav ha digenvez, diskoachet o deus drezo o-unan un teñzor a donioù. Savet hag adsavet neuze ganto a-gevret an tonioù-se da gensonerezh, evit o flijadur o-unan, evit brasañ plijadur an dud tro-dro, hag evit plijadur hollvedel an denelezh.

1 Bolom (*Jean-Michel Veillon – gant aotre hegarat Innacor Editions*) 4:55

Jean-Michel : fleütoù Re ha La

Jean-Mathias : fleütoù oktoboud, alto ha Mi b

Savet e oa bet an ton-mañ gant Jean-Michel da geñver ar bladenn CD « Mycelium » hag a oa bet enrollet en 2017 gant Jacky Molard Acoustic Quartet, strollad dispar mar deus unan.

2 Jour de Foire (*Jean-Mathias Petri*) 6:17

Jean-Michel : fleütoù Mi b, Si b & Fa (*skeuliad mod Bro-Wened*)

Jean-Mathias : fleütoù oktoboud, boud, alto, Mi b ha piccolo

Awenet eo bet an oberenn-mañ gant ar romant « Livre des Rois de Bretagne » gant Yves Elléouët (1932-1975), skrivagner ha livour eus al luskad surrealist anezhañ. Savet e oa bet gant Jean-Mathias e-ser an abadenn lenn « Extraits du Livre des Rois de Bretagne », bet laket war-sav d'ar 15 a viz Genver 1998 en kevrenn Victor Segalen Skol-Veur Brest.

« Devezh foar e Bro ar stêr Elorn; gant an oabl par d'ur rabot o tiskenn diouzh luseg an dorgenn betek riblennoù ar stêr richanus... Aotrouniezh Elorn, hag a ren war an hunioù dizamant : he divabrantoù en dour-red ar vilin a vez o luskellat ar vugaligoù o bonedigoù kroched. » (*Livre des Rois de Bretagne – Embannadurioù Gallimard, 1974*)

Diskenn a reer en ur bed a vetamorfoz ma « *ne santer ken tamm enebiezh ebet etre ar gwirvoud hag ar faltazi* »...

Pemp ton savet gant Kristen Noguès (1952-2007)



J-M ha J-M ken-ha-ken, pep hini diouzh e du, o deus bet an enor hag ar blijadur da seniñ daou-ha-daou gant « Logodennig », e-giz ma veze graet eus Kristen Noguès, mistr he ment ha divent he levezon evel telennerzh ha sonaozourez.

3 Disul I 5:10

Jean-Michel : fleüt Re

Jean-Mathias : fleütoù alto hag oktoboud.

« *Ar sulvezhioù am eus kas oute* » e veze-hi kustum da lâret dimp...

4 Tost d'ar Feunteun (Jean-Mathias Petri) 1:05

Jean-Mathias : fleüt oktoboud

Primaozet eo bet gant Jean-Mathias diwar arroudoù sonerezh en deus bet tro da glevet digant Kristen ha digant he mignon Jacques Pellen, gitarour hep e bar anezhañ, ha sonaozour meur anezhañ ivez... aet da Anaon daouzek vloaz d'he heul.

5 Feunteun Wenn 4:37

Jean-Michel : fleüt Re

Jean-Mathias : fleütoù oktoboud, boud hag alto

Setu penaos Kristen a oa deut a-benn, war-bouez sonaozañ seurt ton, da reiñ bec'h – ha dianal ivez – d'ar sonerien, ha pa vefent e Breizh pe e lec'h all. En ur glevet ac'hanomp o seniñ, un nozvezh bennak, e oa bet awenet ar barzh eus Lannuon Marc Rémond da skrivañ ar gwerzennoù-mañ :

Feunteun Wenn

heol o hun teñval

perak

am selaouez

diskeud on-me

(« *une île avant* » Marc Rémond, 2021)

6 Interlude 2:11

Jean-Mathias : fleüt alto

Na bresk ha hoalus e oa he mouezh, re-bar d'ur fleütenn, gwech o hiraezhiñ, ha gwech o prederiañ.

7 Disul II 4:10

Jean-Michel : fleüt Re, fleütennig Si b

Jean-Mathias : fleütoù oktoboud hag alto

« *A-dra-sur em bez kas ouzh ar sulvezhioù... Ha padal plijout a ra din klevet bole ar c'hleier o son* ». Evel-se e oa Kristen ! Un draig ouzhpenn : sonadeg ar boleoù kleier (eus parrouz Prat, Aochoù-An-Arvor) a zo deut da gemmeskañ enni, pa oa ar sulvezh-se o vont war e dalaroù, fleütoù o c'hoari o zammig telenn.

8 Stang an Noz 7:07

Jean-Michel : fleüt Si b

Jean-Mathias : fleütoù boud hag oktoboud

« O hunvreal e oan: bez e oan e-tal ur stang e-kreiz an noz. A-daol-trumm, war ar riblenn a-dal din, setu m'en em ziskouez ur seurt gweledigezh, en e unan, un den, ...». Ken 'vi gwelet, Logodennig !

Savet e oa bet gant Kristen an tonioù Disul 1 & 2, Interlude ha Stang an Noz evit ar sonadeg « Flûtes de Traverse », hag a oa bet kenbroduet gant Cnat-Scène nationale de Reims/Arts & Rencontres, e miz C'hwevrer 1998

9 Koriezdeki (ton hengounel a Vro-Durkia) 4:33

Jean-Michel : fleüt Re

Jean-Mathias : fleütoù oktoboud, boud, alto ha Mi b

Desket e oa bet an ton-mañ gant Jean-Mathias digant ar gitarour jazz Serge Lazarevitch. Ken abred ha deroù ar c'hantved-mañ hon doa bet kemeret ar boaz da seniñ an ton-se, ha ni neuze o seniñ e par ar pevar-den « Flûtes 4 », asambles gant Jean-Luc Thomas ha Stéphane Morvan.

10 Ar Foll (Erik Marchand) - Hajde Duso (ton hengounel a Vro-Makedonia) 3:30

Jean-Michel : fleüt Re

Jean-Mathias : fleütoù oktoboud, boud, alto ha Mi b

Ar Foll a zo bet savet gant Erik Marchand diwar awen ar barzhoneg *Le Fou d'Elsa* gant Louis Aragon. « Sav-Heol dindan sell ar varzhoniezh da c'hortoz un dazont war hunvreal ».

Ar Foll hag *Hajde Duso*, an ton eus Bro-Vakedonia a glever da heul, a zo bet enrollet war bladenn CD *Pruna* (Erik Marchand et les Balkaniks – Le Chant du Monde, Harmonia Mundi, 2004).



Béla Bartók (1881-1945) Un dibab eus 44 Daouad evit 2 violoñs (1931)



- | | |
|-----------|--|
| 11 VI. | Magyar Nóta I (Kanaouenn Hungarek I) 0:56 |
| 12 XXXV. | Rutén Kolomejka (Kolomejka Rutenek) 1:00 |
| 13 XIX. | Mese (Marvailh) 0:53 |
| 14 X. | Rutén Nóta (Kanaouenn Rutenek) 1:03 |
| 15 XIV. | Párnás Tánc (Dañs ar goubenner) 0:43 |
| 16 IX. | Játek (Rimadell) 0:42 |
| 17 XXV. | Magyar Nóta II (Kanaouenn Hungarek II) 0:50 |
| 18 XXXII. | Máramorosi Tánc (Dañs deus Máramaros) 0:43 |

Jean-Michel : fleüt Re

Jean-Mathias : fleüt alto (nemet Rutén Nóta : fleüt boud)



19 Les Elfes (*Gérard Delahaye*) 4:07

Jean-Michel : *flüt Re, La & Do*
Jean-Mathias : *flüt oktoboud*

Savet eo bet an ton kevrinus-mañ gant Gérard Delahaye. Enrollet e oa bet gant Jean-Michel e-kerzh e bladenn solo Er Pasker (1999) a-gevret gant Kristen Noguès ouzh an elektro-deleñn. Kenkoulz all e vez santet kevrin an ton gant son ar gourfleüt-oktoboud.

20 Fretless Flute Song (*Steve Kujala*) 2:39

Jean-Michel : *flüt Re*
Jean-Mathias : *flüt oktoboud hag alto*


Troioù-distroioù dic'hortoz a zo bet c'hoarvezet gant ar sonaozadenn-mañ a-hed an amzer hag a-dreuz meur a vro (Teksas, Breizh, Bro-Velgia, An Izelvroioù ... ha Kalifornia). Ken ec'h eo disheñvel a-walc'h ar pezh a vez sonet gant Jean-Michel diouzh ar pezh a oa bet kompozet gant ar fleütour jazz Steve Kujala. Mat pell 'zo, da-lâras Steve : « *JM, an doare ma vez sonet ganit en deus laket ma spered da cheñch bro; mar plij, dalc'h d'hen seniñ memes mod !* »

21 Valse pour Léa (*Jean-Mathias Petri*) 2:36

Jean-Michel : *flüt Re*
Jean-Mathias : *flüt oktoboud, boud hag alto*

Da gentañ penn e oa ar vals-mañ ul lodenn eus un oberenn hiroc'h, « Emgav ar 4 fleüt » hec'h anv, hag a oa bet sonet da geñver sonadeg kentañ ar pevar-den « Flûtes 4 » en 1995 en Plûned. Dediet eo da Léa ha Sarah Petri ha d'an holl vugale e pennospital Lannuon-Traezhtael.

Maurice Ravel (1875-1937) - Diwar *Trois Chansons pour Chœur mixte a capella* (1915)



22 Trois Beaux Oiseaux du Paradis 2:11

Jean-Michel : *flüt Re*
Jean-Mathias : *flütoù Ut, alto, boud hag oktoboud*

Ur ganenn laz-kanañ eo stumm orin an oberenn-mañ. Ober a ra dave da Vrezel Bras 1914-1918 : ur plac'h yaouank a vez roet dezhi keloù mantrus diouzh an talbenn gant laboused kevrinus ha kenedus...

*Tri evnig koant a'r Baradoz,
(Ma mignon, heñ'zh 'zo aet d'ar brezel)
Tri evnig koant a'r Baradoz
Dre 'mañ 'oa tremenet.*

*Unan 'oa glasoc'h evit an oabl,
(Ma mignon, heñ'zh 'zo aet d'ar brezel)
Egile a oa liv an erc'h,
Hag an trede ruz-glaou-tan.*

*« Evniged koant a'r Baradoz,
(Ma mignon, heñ'zh 'zo aet d'ar brezel)
Evniged koant a'r Baradoz,
Na Petra 'zegasit ? »*

*« Sed ganin ur sell glas liv an oabl.
(Da vignon, heñ'zh 'zo aet d'ar brezel) »
« Ha me, war ho tal, gwenn 'vel an erc'h,
A roy ur pokig, glanoc'h ma vo. »*

*« Evnig ruz-tan a'r Baradoz,
(Ma mignon, heñ'zh 'zo aet d'ar brezel)
Evnig ruz-tan a'r Baradoz,
Petra 'zo en ho kerz?"*

*« Ur galonig ruz gwad ha tan...
(Da vignon, heñ'zh 'zo aet d'ar brezel) »
« Ac'h ! sklaset eo ma c'halon din...
Deoc'h-hu d'he c'has pelloc'h».*



Jean-Mathias Petri a vez o seniñ ouzh fleütoù-treuz metal :
fleütoù oktoboud, boud, alto diwar zorn **Jean-Yves Roosen**
fleüt Ut **Sankyo** (gant ur penn-fleüt koad diwar zorn **Jean-Yves Roosen**)
fleüt Mi b diwar zorn **Jacques Leff**, hag a-hend-all ouzh ur fleütenn piccolo **Yamaha**.

Jean-Michel Veillon a vez o seniñ ouzh fleütoù-treuz koad :
fleütoù La, Si b, Do ha Fa (hervez ur skeul gozh a Vro-Wened) diwar zorn **Jil Léhart**
fleütoù Re hag Mi b diwar zorn **Stéphane Morvan**, ur fleütenn vihan Si b a zo bet graet anezhi
surmat gant **Wylde** war anv **Rudall, Rose, Carte & Co** (Londrez, 1867) hag a-hend-all
ur pif-metal diwar zorn **John Sindt**.

Gant Jean-Michel Veillon & Jean-Mathias Petri eo bet kempennet sonerezh *Bolom, Jour de Foire*
ha *Koriezdeki*.

Gant Jean-Mathias Petri eo bet treuzskrivet evit fleütoù sonerezh *Disul II, Stang An Noz*,
44 Daouad evit daou violoñs ha *Trois Beaux Oiseaux du Paradis*.



« Arz ar pallennerzh a vez bepred o c'hoari gant tresoù liesseurt diouzh an druilh, tresoù o kenweañ, o tigenweañ hag o vont kuit a-ziwar-wel, kement ha dont endro d'en em ziskouez dindan livioù disheñvel, ha dalc'het ganto memestra ar furmoù a oa bet meizet da gentañ penn. »

« L'esthétique du tapis joue de ces jeux de motifs qui s'entrelacent, se défont et disparaissent pour réapparaître avec des couleurs différentes mais en répétant les formes déjà perçues. »

Eric de Chassey « *Les tableaux d'une exposition : le Maroc de Matisse* »
Hors-série de L'Oeil - 1999

Enrollañ gant Yann Madec en WM Studio (22170 Brengolou) d'ar 27, d'an 28 ha d'an 29 a viz Meurzh 2023.

Enrolladennoù da heul ha gourfenn-produiñ : Jean-Michel Veillon & Jean-Mathias Petri.

Enrollet e oa bet boleoù kleier parrouz Prat (Disul II) a-ziabell deus 'tal-kichen Poulloger gant Guy-Noël Ollivier (*Kleier eus Kreiz Treger*).

Songemmesket gant Yann Madec

Mastering (mod stereo transaural) : Isabelle Davy, Circé, Paris

Troidigezh vrezhonek hag addispleg gant Iwan Couée

Produiñ & kelaouiñ: Empreinte empreinte.mus@gmail.com

